

CANTIC

AN OTRO SANT ROCH

Voar ton Sant TANGUY à Santès EODÈTTE.

1.

Cannomp gant melodi, cannomp gant joaüsdet
Eur hantic neve flam bars en gloar an Drindet,
En enor da sant Roch, servijer da Zoue,
En deus evit partaj rouanteles an êe.

2.

En eur hartier a Franç, er guer a Languedoc,
A dut a ligne vad eze ganet sant Roch.
E dad oa hanoed Yan, e vam a voa Tiber,
A re o demeureans er guer a Vonpellier.

3.

Sant Roch ne heuille quet en pad e yaouanquis
An dans ac an ébat, evel ma man ar his ;
Occuped de a nos gant Doue er beden,
O castian e gorf gant yun a pinijen.

4.

Goude maro e dad e voersas e voyen,
Ac e tistribuas an harhant d'ar beoyen ;
Neuze gouisquet en paour e quemer pen an hent,
En eur laret adieu de vro a de guerent,

5.

Evit monet da Rom da ober e beden,
Voar be an ebestel, a re ar verzerrien.
Pa arias en Rom en eur laquas ractal
Da serviji an dut clan ebars en ospital.

6.

Eur vocen araget aré en amzer-man
Ravaj ar guer a Rom ac er herrio nissan;
Sant Roch dre zin ar groas eb remet al abet
A oëllaé tut clan ac a re ar yeheet.

7.

Houi a zo admirabl, ma Jesus, ma otro,
Dreizoch e teu ar sent da ober miraclo;
Groed eur memeus miracl en andret on ine:
Reit ar yeheet don horf a ners don harante.

8.

Doue a bermetas ma vije afflijet
E servijer fidel ive gand ar hlevet;
Ouspen an derrien dom evit lavaret guir
Evorzet voë treuzet ive gant eun ten piir.

9.

Goude bean groet yach e quomeras ezin
Evit distrein de vro en guis deur pelerin,
Mes chom a eure clan en eur hoat estranjour,
Elech na guefe den da rein dean sicour.

10.

Setu aze penos eo tretet gant Doue
Are pere e deus vitan gouir garante;
Mes qui un dezentil a hane deus ar vro
A digasse dean bara ene heno.

11.

Doue en deus soufret nombr bras a soufranso
Azo evidomp oll antreet en envo.
Ma Doue, houï so mad, houï so carantezus,
Na servijin biquen nemerdoch, ma Jesus!

12.

Bras eo, o ma Doue, bras eo o providans!
Me a laqou enoc'h ive ma oll fiars.
Erfin dre gals a boan a dre gals a viser
En eum rentas er guer demeus a Vompellier.

13.

Mes commèret evoe evit, un espion,
Ma oë laquet ractal ebars en eur prison.
Sant Roch so inosant ae a so prisomiet,
Laquet er bassefos eb bean meritet.

14.

A me, o ma Jesus! corrompet a behet,
Ne fell din souffr netra gant guir basiantet.
Gourveet voar ar plous, guisquet fal dierhent,
Sant Roch ne lavar guir na da zen ne neum glem.

15.

Chom a ra er guisse pemp bla ente brison
Eb cavet diant den neb consolation;
En obstant de ol boan en eur gaf hoas ouspen
Da vean afflijet ive gant ar vossen.

16.

Santout a re e voa ari, tost d'an termen
Ma haze da receo en env e gurmen,
Da vont da finisan e dourmancho griec,
Da gafout eur bonheur na ne finisso quet.

17.

Quent couitat ar bet-man ebars en e brison
E heure e beden da Doue a galon
Evit a re pere a vije afflijet
Gant clevejo estranj a danjêrus meurbet.

18.

Diganec'h e houllan, ma Jesus souveren,
Evit are vo clan gand flug ac ar vossen,
Ma defo soulajamant en o affliction
Pa deuont d'am pedin deus a greis o halon.

19.

Mervoël a ra neuse evel ma varv ar sent,
Er blaoës trizec cant da seis bla voarnugent;
E ine evurus a voe gant joaustet
Dougê gant an ele da veulin an Drindet.

20.

Goude ma va maro e voe anaveet,
Dre eur groas a oa voar e gorf inprimet;
An ol bian a bras a rent dean neuse
An enor na renter quet memeus d'ar rouane.

21.

Deus e gorf presius nep a ellai tostad
Da guemer relego ac ive e ziliat :
Guir eo, o ma Jesus, ar pes o heus laret
Neb a neum izelayo a vezo uellet.

22.

Canomp gant joastet, canomp gant meulodi
Da Doue, da sant Roch a d'ar Verhes Vari,
Na ne sessomp james o veuli an Drindet ;
Ennes eo guir deveur an ol gatoliquet.

23.

Pedomp ol ar sant-man demeus a vouir galon
Ma teuio don sicour é on affliction :
Bras eo e buissans en quefer un Doue
Ma rag yehet don horf a ive don ine.

Propriété de l'auteur.

R. P.



Lanhuon, intanvez Ar Goffik, mouler.